

D'ar 1^{añ} a viz Meurzh

- E 304, el Liban, merzherenti **santez Eudoksia**.

Ur Samaritaneez e oa, o ren buhez ur serc'h en Heliopolis. Gonezet d'ar C'hrist, e voe tamallet e gaou dirak ar gouarnour gant ur garantez kozh dezhi, ha barnet d'ar marv.

- E 492, e Roma, distro da Zoue ene **sant Felis III**, pab.

Hendad ar pab sant Gregor-Veur, e strivas da zifenn ar gwir feiz gant skoazell e ziagon sant Jelaz a voe e warlerc'hier.

- E 713, e Bro-Roen (Rheinland), **sant Suitbert** (Swibert), eskob e Bro-Saoz hag avielour Germania.

A orin eus Bro-Skos e voe da gentañ manac'h e Norzumbria hag e teuas da vezañ keneil sant Willibrord en e visionoù. Eskobet gant sant Wilfrid er Friz, e tegasas an Aviel d'ar vBataved, d'ar Frizoned ha da bobloù german-all. Da-geñver aloubadegoù ar Saksoned en em dennas war un enezenn eus ar stêr Roen e-kichen Dusseldorf hag e tiazezas abati Kaiserswerth lec'h ma varvas.

- War-dro 550, **sant Albin** (Lt. Albinus), eskob Anjev. Ganet e Langedig, Bro-Ereg, e voe manac'h e abati Tiliieg e Merzhelieg en eskobiezh Naoned hag abad Nantilly e-kichen Saumur e Bro-C'hall. Diuzet da eskob Anjev e 529 e kendalc'has da ren ur vuhez manac'h. Stourm a reas a-enep d'an dimezioù disreol a oa niverus e-touez an noblañsoù hag e herouezas disentezioù trede senez Orleañs evit adnevezidigezh an Iliz e Galia.

- E mervent enezenn Vreizh (Kembre diwezhatoc'h), war-dro 589, **sant Dewi pe Dewi** (Kb. Dyfrwr), eskob-abad Menevia ha Paeron Bro-Gembre.

Mab santez Nonn, ganet e Ceredigion, e voe badezet gant sant Aelwev, eskob Imleach en Iwerzhon ha desavet e manati sant Ildud. Da gentañ penitiour en enez Wyth e savas un abati damdost d'ar mor, e mervent Bro-Gembre hag e savas ouzhpenn daouzek manati. Skediñ a reas war ar vro, brudet ma oa koulz evit skouerioù kaer e vuhez hag evit e brezennoù. Lesevet Dourour, e latin Aquaticus, boas ma oa diouzh doareoù menec'h Keltia da ganañ ar salmoù soubet en dour.

- En deiz-mañ e c'heller ober **kounidigezh holl sent Kembre** a vez lidet eno d'an 8 a viz Du.

Kalz anezho o deus bevet da vare ar sent eleze er pempvet ha c'hwec'hvet kantved hag alies e voent e darempred gant Kernev-Veur, Iwerzhon, Skos ha Breizh-Vihan.

- E mervent enezenn Vreizh (Kembre), er VI^{vet} kantved, **santez Tutwenn pe Uzenn**, mamm-gozh sant Dewi.

- E Breizh-Vihan, er VI^{vet} kantved, **sant Konwal** (Congual) manac'h, diskibl sant Devrig (kv „Saint-Congard“).

- E hanternoz enezenn Vreizh (Bro-Skos diwezhatoc'h), e 625, **sant Ernin** pe **Ernán** pe **Marnog**, Iwerzhonad, manac'h en enez Iona, abostolour e Bro-Skos, eskob Aberdin.

- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Monenn**, eskob Clúain Fearta ; **sant Caisín** (Kasín), manac'h, keneil sant Finnian Clúain Loraird.

D'an 2^{ed} a viz Meurzh

- E 1127, e Brugge (Bruges), merzherenti **ar gwenvidig Karl I^{añ} a Flandrez**.

Hag eñ priñs Denmark ha da c'houde kont Flandrez e stourmas evit ar reizhded hag e tifennas ar beorion, betek ma voe lazhet gant soudarded gavailhet a nac'he ar peoc'h a glaske mirout er vro.

- E Breizh, e 582 e Brasparzh, **sant Jaoua** pe Yaoua, abad Daoulaz, warlerc'hiader e eontr sant Paol Aorelian war sez eskobiezh Leon. Emañ e vez en e chapel e Plouvien.

- E mervent enezenn Vreizh (Kembre), er V^{vet} kantved, **sant Gouestlian** (Kb. Gwystlian ; Gl. Gistilien), eskob abad Menevia, eontr sant Devi.

- En Iwerzhon, e 637, **sant Fearghna**, lesanvet *ar melennek*, abad.

Kar ha diskibl sant Koulmkell e voe e warlerc'hier evel abad en enez Iona.

- En Iwerzhon, e 767, **sant Slebhine**, abad en enez Iona.

- En Iwerzhon, **sant Manntan**, diagon en Iwerzhon.

- E Bro-Saoz, e 677, **sant Sead pe Kez**, (Gl. Céadde pe Chad ; Lt. Ceadda, Ceddus), eskob, breur sant Sede (Sedrig), abad Lastingham.

Bez' e voe eskob Evrog e Norzumbria hogen e rankas dilezel e sez hag en em staliañ e Liechfield lec'h ma pleustras e vinistrerezh diouzh skouer an tadoù, uvel, deol ha gant gred un abostol.

- E 726, **sant Gwilleig** (Willeic), lean. Diskibl sant Suitbert ar Skosat e voe priol Kaiserwerth en Alamagn lec'h ma skedas e santelezh.

- E Breizh, e 1649, distro da Zoue ene **c'hoar Mari a Santez Barba**, leanez ursuladez.

Ganet e Pondivi. Goude ur vuhez diroll a blijadurioù e teuas da vezañ leanez hag e renas ur vuhez skouerieus grataet ma voe a bep seurt donezonoù kevrinel.

D'an 3 a viz Meurzh

- E 807, **sant Anselme a Nonantola**, abad.

Ganet e 720, e oa dug Frioul pa zilezas ar vuhez foran evit mont da vanac'h beneadat. E 752 e tiazezas en Emilia, war un dachenn roet gant e vreur-kaer ar roue Astolf, abati Nonantola gant un ospiti evit ar birc'hirined a zeuas da vezañ ur greizenn speredel ha sevenadurel a-bouez.

- War-dro 1040, e Kaffungen e bro-Hessen, **santez Kunegond**, impalaerez Germania.

Gant he gwaz an impalaer sant Herri e tivizas mirout he gwerc'hded hag en em ouestljont da harpañ an Iliz. Ur wezh intañvezet ez eas da vanac'hez e manati Bamberg lec'h ma voe sebliet e-kichen he gwaz.

- E Breizh-Vihan, e 532, distro da Zoue ene **sant Gwennole**, mab sant Fragan ha santez Gwenn, abad diazeour Landevenneg, kuzulier ar roue Grallon.

Mont a reas da skol sant Budog en enez Lavred lec'h ma kavas en-dro e vreudeur Jagu ha Gwezheneg. O lezel a reas eno avat evit mont gant 12 manac'h-all da ziazezañ ur manati, da gentañ war enezenn Tibidi e lenn-vor Brest. Met prestik goude, dre ma kreske ar gumuniezh, ez ejont da sevel, war an aod e-tal an enezenn, abati Landevenneg a zeuas da vezañ ur greizenn vanac'hel hollbouezus

- E Breizh-Vihan, ar sent **Tanvoud, Berzhaot, Merzhin**, menec'h, diskibled sant Gwennole.
- E Breizh-Vihan hag er VI^{vet} kantved, **sant Gwevred**, manac'h.
- En Iwerzhon :
 - er V^{vet} kantved, **santez Conna**, leanez, diskiblez sant Padrig ;
 - er VI^{vet} kantved, **sant Faile**, abad en Iwerzhon ;
 - er VII^{vet} kantved, **sant Sagarzh** (Iw. Sagart, Lt. Sacer), abad Sagart e-kichen Dulenn;
 - en VIII^{vet} kantved, **santez Foila**, c'hoar sant Kolgan;
 - e 723, **sant Kile-Krist** (Iw. CéileChrïost), manac'h Kile-Doue, a savas un iliz e-kichen Dulenn.
- E hanternoz enezenn Vreizh (Bro-Skos), er VII^{vet} kantved, **sant Lamalis**, penitiour war un enezenn war aod Arran a zoug e anav: Lamlash.
- E 1796, e Gwened, andishadur ar gwenvidig Pêr-Reun Rogue, beleg, a vez lidet d'an 10 a viz Mae.

D'ar 4 a viz Meurzh

- War-dro 273, e Ptolemais e Siria, merzherenti santez Juluana, lakaet d'ar marv war-un-dro gant he breur **sant Paol** hag o mignoned **sant Kodrad, sant Akas ha sant Stratonik**.
Ar c'hastizoù krisañ ne voent ket trec'h d'o feiz. An tri mignon a voe a voe dibennet, Paol taolet en ur fozell lastez, ha Juluana, goude bezañ bac'het en un ti oriadezh, a voe dibennet ivez.
- Er IV^{re} kantved, **sant Bazil hag e geneiled, ar sent Gapito, Efrem, Nestor hag Arkad**, abostoled Bro-Grimea ha kreisteiz Rusia.
- E 1484, distro da Zoue ene **sant Kazimir**, priñs e Lituania.
Mervel a reas d'e c'hwec'h vloaz warn-ugent diwar ar c'hleñved-sec'h goude ur vuhez lec'h ma splannas e c'hed evit ar feiz, e spered a binijenn, e c'hlanded, e vadelezh evit ar beorion, e zeolieg evit ar Werc'hez Vari hag an eukaristiezh.
- War-dro 540, e Säcking en e bro-vBaden war stêr Roen, e mervent Alemania, **sant Fridolen pe Fridolin**, abad iwerzhonat. Bet manac'h e Pictavia (Poitiers) war sez Sant Hiler e savas abatioù en Alemania (Elzas, Baden), Helvetia ha Burgondia.
- E 875, e Bro-Skos, merzherenti **sant Adrian**, abad iwerzhonat.
Genidik eus Iwerzhon e rankas kuitaat e vro en abeg da argadoù an Daniz hag ez eas da Vro-Skos lec'h ma tiazegas ur manati war enezenn May. Eno e voe lazhet gant Daniz war un dro gant kalz eus e ziskibled. Ar manati a zeuas da vezañ ul lec'h pirc'hirinañ brudet.
- E 1825, e Gwened, distro da Zoue ene **ar wenvidigez Mamm Sant-Loeiz (Marie-Louise-Élisabeth de Lamoignon)**, diazevouez leanezed Karitez Sant-Loeiz e 1803 e Gwened.

D'ar 5 a viz Meurzh

- War-dro 195, e Kaezarea Palestina, distro da Zoue ene **sant Teofil**, eskob ha feizvonnour. Da vare an impalaer Septimus e voe anavezet evit e furnezh ha santelezh e vuhez. Harpañ a reas ar pab sant Viktor evit ma voe lidet Pask d'ur Sul en Azia ha n'eo ket da zeiz-ha-bloaz ar ^{XIV}^{vet} nisan.

- War-dro 250, e e Pamphylia, merzherenti **sant Konon**, merzher. Ganet e Nazared, e oa liorzhour eus e vicher, un den kuñv hag uvel a galon. Da-geñver heskinadeg Decius, war urzh gouarnour ar vro, e voe sanket tachoù en e genvelloù hag en e dreid ha lakaet da redek dirak karr hemañ betek e lakaat da vervel.

- E 254, e Roma, **sant Lucius I^{añ}**, pab, feizvonnour bet meulet gant sant Kiprian. A-boan diuzet da warlerc'hier sant Korneli, e voe harluet da-geñver heskinadeg Gallus. Dre c'hras Doue e c'hellas distreiñ hag a voe degemeret gant levezeg vras gant ar feizidi. Abalamour d'ar poanioù kriz diwasket gantañ e voe graet ur merzher anezhañ.

- E 309, e Kaezarea Palestina, da vare Diocletianus, merzherenti **sant Adrian**. O tont eus Batanea e kreisteiz Siria e oa deuet da skoezellañ kristenion heskinet Palestina pa voe harzet d'e dro, roet da gentañ d'al leoned ha lazhet en diwezh gant un taol kleze er gouzoug.

- E 618, e Arles er Brovañs, **sant Virjil**, eskob. Manac'h e Lerina, e voe anvet abad Sant-Siforian Kêr-Aogustodun (hiziv Autun), a-raok bezañ anvet eskob Kêr-Arles. Ar pab sant Gregor Veur a fizias ennañ ober war-dro greadoù Iliz Galia en e anv ha war c'houlenn ar pab e roas bod da sant Eosten ha d'e venec'h o vont da Vro-Saoz.

- E Breizh, er ^V^{vet} kantved, **sant Elven**, manac'h.

- E 480, **sant Peran** (pe **Piran** pe **Kinerin**), abad hag eskob, patrom Kernev-Veur ha patrom ar veingleuzerion. Genidik eus Iwerzhon e teuas da rouantelezh Devnon (Kenev-Veur) lec'h ma pleustras e wazerezh. Hervez lod e varvas e 480. Hervez lod-all en dije bevet er ^{VI}^{vet} kantved hag e vije stummet e mervent e Llanilltud Fawr (Kembre).

- En Iwerzhon, er ^V^{vet} kantved, **sant Kolman**, diskibl ha keneil sant Padrig. Sebeliet e voe gantañ en abati Armagh. Badeziñ a reas sant Deklan.

- Berped en Iwerzhon, war-dro 530, **sant Kieran (Ciaran)**, eskob, Iwerzhonad, diskibl sant Padrig. Urzhiet eskob Osraige e tiazegas manati Saighir Chiaráin. Moarvat eo an hevelp hini ha **sant Gelan pe Jelan** (Gl. Géran pe Gérand ; Lt. Geranus), enoret e Bro-Wened evel diskibl sant Padrig hogen kemmesket a-wezhioù gant sant Gireg pe Gevrog.

D'ar 6 a viz Meurzh

- War-dro 680, **ar santezed Kineburg, Kineswid ha Tibba**, manac'hez e Bro-Saoz, merc'hed Penda, roue pagan Mersia. Hemañ en devoe c'hwec'h bugel en o zouez sant Ethelred a voe roue war-lerc'h e dad, Kineburg a ziazegas un abati e Dormancaster (hiziv Castor e Northamptonshire) lec'h ma teuas Kineswide he c'hoar ha Tibba a oa moarvat eus an tiegezh.

- E 1282, ganedigezh en neñvoù **santez Oanez Bohemia**, gwerc'hez.

Hag hi merc'h ar roue Ottokar, e nac'has meur a ginnig dimeziñ ha zoken hini an impalaer Frederik II, dre ma felle dezhi dimeziñ gant Jezuz Krist hepken. En em ouestlañ a reas oc'h heuliañ reolenn santez Klara e manati Sant-Salver he doa lakaet da sevel hag e heulias ar baourentez peurvut bet herouezet ha broudet gant santez Klara he-unan.

- E 1449, e Ghent e Flañdrez, distro da Zoue ene **santez Koletta a Gorbi**, gwerc'hez, adreizhourez leanezed Santez-Klara.

Ganet d'an 13 a viz Genver 1381 e Corbi e Pikardia e vevas eno e-pad tri bloaz serret en ur peniti e-kichen an iliz. Degemeret d'ober he gouestloù hervez reolenn santez Klara ec'h adreizhas meur a vanati hervez doare bevañ kentañ an urzh o toujañ dreist holl d'ar baourentez ha d'ar binijenn.

- E Breizh-Vihan, war-dro 480-485, distro da Zoue ene **sant Sane**, eskob Luimneach (Limerick) en Iwerzhon. Deuet da Vreizh en dije dilestret e Plougonvelen e Bro-Leon ha da c'houde e vije bet penitiour e Lokmaria-Plouzane.

- En VIII^{vet} kantved, **sant Baldred pe Balter**, eskob skosat, moarvat war-lerc'h sant Kentigern (pe Mungo) e Glasc'ho. Echuet en dije e vuhez evel penitiour war ribl al Linne Foirthe (Firth of Forth).

- D'an hevelep deiz, **sant Kaerou** (Kb. Cadroe), Breizhad (Kembre), abad Waulsort (Vasor) e Belgia.

D'ar 7 a viz Meurzh

- E 203, e Kartaga, da vare Septimius Severus, merzherenti **ar santezed Perpetua ha Felisite**.

Hag int katekiziadezed, an eil, Perpetua, patrikianez, mamm ur bugel a zaou vloaz, eben, Felisite, sklavez ha dougerez, e voent roet da vezañ debret o-div gant al loened gouez.

- E 309, e Kaezarea Palestina, merzherenti **sant Eubul**.

Roget da gentañ gant al leoned, daou zevezh goude e geneil sant Adrian ar mezeg, e voe peurlazhet gant un taol kleze. Bez' e voe ar c'hristen diwezhañ o resev kurunenn ar verzhherinti er gêr-se da vare heskinadeg Diocletinus.

- E 340, distro da Zoue **sant Paol ar C'haezh-Doue**, manac'h.

Hag eñ kouer en Egipt ne grede ket an dud a lavare dezhañ e veze doganet gant e wreg betek he zapout e gwall o tont eus ar parkeier. He lezel a reas gant he c'harantez hep broc'hañ hag ez eas d'ar gouelec'h da gaout sant Anton lec'h ma teuas da vezañ kelenner en hentoù speredel hag er fealded da Zoue.

- E 686, **sant Easterwin**, abad e Bro-Saoz.

Goude ur yaouankiz e lez rouaned Norzumbria ez eas da vanac'h e amheulierezh sant Benead Biskop, diazeziour abati Wearmouth, ma oa kar dezhañ ha ma voe e warlerc'hier eno.

- E 1274, e manati kisterkiat Fossanova el Latium, tremenvan sant Tomaz Akwino a vez lidet d'an 28 a viz Genver.

- E Breizh, en IX^{vet} kantved, **sant Eleizhran**, eskob Roazhon a ziwallas Roazhon diouzh an Normaned.

- E Breizh, e 1625: **Erzerc'hadenn skeudenn santez Anna ouzh Iwan Nikolazig**. E-pad an noz etre ar 7 hag an 8 a viz Meurzh 1625 en em ziskouezas santez Anna ur wezh ouzhpenn d'he servijer Iwan Nikolazig ouzh e henchañ da zizoleiñ dre vurzhud un delwenn sanket abaoe kantvedoù e douar ur park anvet ar Bosennoù, gant an urzh da adsevel eno he santual broadel. Da-geñver an Dispac'h gall e voe torret ar skeudenn ha taolet en tan. Tud a feiz a zeuas a-benn avat da saveteiñ un tamm anezhi (un hanter eus an dremm) a zo enframmet hiviziken e sichenn an delwenn kehelet er vrientiliz.

- E Breizh c'hoazh, e 1684, **an Aotrou Charlez Goandour**, beleg. Ganet e Gwiskri e 1640 e voe degemeret en eskobiezh Gwened hag anvet person Zinzag. War e barrez e aozas misionoù ha retredoù frouezhus-meurbet. Mervel a reas oc'h ober war-dro reuzidi ur c'hleñved-red a wastas ar vro.

- E Kernev-Veur, tro-dro da 520, **sant Enodog** pe **Gwenedog**, eskob. Reiñ a reas douaroù da sant Pereg evit sevel e vanati e Lannwedhenek hiziv Padstow.

